

AR SABOTOUER-KOAD**Le sabotier**

Ma mestrez koant a zo dimezet
Me a garje a-walc'h ne vije ket

Dimezet d'ur sabotouer-koad
En o lochig bihan e-kreiz ar c'hoad

En o lochig bihan en un toull distro
E-lec'h n'erru den d'he c'hoñsola

E-lec'h n'erru den d'he c'hoñsola
Ar sabotouer-koad, hennezh a rae

Hennezh a lavare dezhi bepred
Tavit Perin, na ouelit ket

Tavit Perin, na ouelit ket
Koad d'ober tan, ne vanko ket

Koad d'ober tan ne vanko ket
Bleud d'ober yod, ne lâran ket

Pa vanko dour me ec'h aio davit
Pa vanko gwin me ec'h aio kuit

Kar ar sabotouer pa labour
N'eo ket mat dezhañ da evañ dour

Met ar gwin ruz hag ar gwin gwenn
Ar gwin-ardant leizh e werenn

*Ma jolie fiancée est mariée
J'aurais aimé assez qu'elle ne le fut pas*

*Mariée à un sabotier
Dans leur petite cabane au milieu des bois*

*Dans leur petite cabane, un trou perdu
Où personne ne vient la consoler*

*Où personne ne vient la consoler
Le sabotier, lui, le faisait*

*Il lui disait toujours
Taisez-vous Perrine, ne pleurez pas*

*Taisez-vous Perrine, ne pleurez pas
Il ne manquera pas de bois pour faire du feu*

*Il ne manquera pas de bois pour faire du feu
De la farine pour faire la bouillie, je ne dis pas*

*Quand il manquera de l'eau je partirai en chercher
Quand il manquera du vin je partirai*

*Kar le sabotier quand il travaille
Ce n'est pas bon pour lui de boire de l'eau*

*Mais du vin rouge et du vin blanc
De l'eau de vie plein le verre*